

329

.....

## AR MALVRAN HAG AL LOUARN.

.....

War doun *an tra la la*:

Un devez ar Malvran, war eur wezen klujed ;  
A zalc'he enn he veg eur grampoezen fritet,  
Pa zeuaz al Louarn didennet gand ar c'houez ;  
Hag a gomsaz out-han'vel-man dre c'hoaperez.

War doun ann tra la la la (*bis*),

War doun ann tra deri dera tra la la:

Ha de-hoc'h, va Aotrou, penaoz a reomp-ni ?  
Trugarez, Alanik, ne c'houtann ket ; na c'houi ?  
Va bugale ive, nemed ar bihana,  
A zo gwal ziferned evit ann deisiou-ma.

War doun, etc.

Doue ! va c'halounik, c'houi a zo fichet mad ;  
E Paris eo, m'hen tou, a brenid ho tillad.  
Ia-vad, a lavaraz rak-tal d'ar godiser,  
Hac a roaz d'ez-han hano he gemener.

War doun, etc.

Mar d-eo kaer ho mouez kemend hag ho chupen ;  
Re'z oc'h, feiz d'am douchik, d'ar c'henta kanerien.  
Kanit 'ta d'in, mar plij, eunn draig, eunn netra:  
A 'viscoaz'nn ho tiad oe'r c'hanerien gwella.

War doun, etc.

Kerkend ar paour kez sod, heb gortozi pedenn ;  
A ganaz a c'hrad vad eur sounig Iann ar Gwenn ;  
Hag, evel ma'z eo red, evit gallout kana,  
E tigoraz he veg, hac he damm da goeza !

War doun, etc.

( 2 )

Nouze al Louarnig , ne glaske netra ken ,  
 A lammaz war-n-ez-han , 'nn eur c'hoarzin a boez  
 Goude e lavaraz : me'm euz ho-koapeet ! (penn,  
 N'oc'h ket guisket kaer na kana n'ouzoc'h ket ,  
 Kana ann tra la la la.

Pa glevaz kement-man , kounared ar Malvrann :  
 O droug-eur ! eme-z-han , berzed eo ann emgann !  
 Paked ounn , laeret ! d'ann diaoul ann tonkadur !  
 Kosa ar Malvrini tremen 'vit krouadur !  
 War doun , etc.

Chetu , 'me eul lounker , kentel ar ganaouen,  
 Brini bihan ha braz , dalc'hid-hi enn ho penn :  
 Ne'z eo na fur ma mad ( ec'h hellid her c'hridi ),  
 Pa gereur ar c'hrampoez , kana enn eur zibri.  
 War doun , etc. Y. T.

(Perc'hentiez Erv. Tanguy).

---

## AR MALVRAM VENJET.

*Hevelep toun.*

C'houi 'anav kanaouen ar Malvrann goapeet,  
 Chetu diwar-ben ze kelou ha n'ouzoc'h ket :  
 Deac'h p'oann o tremen dre greiz coad ar Medig,  
 Eweliz al Louarn gourvezet maro mik.  
 war doun , etc.

He dad , ve vam , he vreur , he c'hoar , he gendirvi  
 A oa enn-dro d'e-z-han , oll oc'h huanadi ,  
 Fichtre ! 'me'l louzaouer , louarn a wiziegez ,  
 Mouged eo bet Alan gant re gofad krampoez !  
 war doun , etc.